

OFIS PUBLIK
AR BREZHONEG



OFFICE PUBLIC
**DE LA LANGUE
BRETONNE**

SIFROÙ DISTRO-SKOL AR C'HELENN DIVYEZHEK E 2014


POL STUDI HA DIORREN
ARSELLVA IMPLIJ AR YEZHOU
GWENGOLO 2014

E 2014, evit ar 37^{vet} distro-skol da-heul, e talc'h ar rouedad skolioù d'en em zispakañ ha kresk zo gant sifroù ar c'helenn divyezhek.

4 lec'h nevez zo bet digoret (14 lec'h nevez e 2012 ha 9 e 2013). En abeg d'ar gendestenn hollek (dilennadegoù-kêr, staliadur ar MOT¹) eo dreist-holl ez eus nebeutoc'h a lec'hioù nevez. **502 skoliad divyezhek ouzhpenn a zo** memes tra, ar pezh a ra d'an niver a skolidi divyezhek tostaat da 16 000 a skolidi.


Digoradurioù

Niver a lec'hioù divyezhek nevez digoret bep bloaz er c'hentañ derez



- **4 lec'h divyezhek zo bet digoret er skolioù-mamm** (9 e 2013, 14 e 2012) :
 - o 3 gant an deskadurezh publik (evit derc'hel soñj, 3 lec'h publik nevez a oa bet da vare dilennadegoù ti-kêr 2001 ivez ha 2 nemetken e 2008) : Ploueg-ar-Mor (22), Kore (29) ha Plañvour (56).
 - o Hini ebet gant an deskadurezh katolik (ar wech kentañ eo abaoe 2008 ne vefe digoradur ebet e rouedad ar skolioù katolik e Breizh a-bezh).
 - o 1 skol Diwan : Roazhon 2 (35).

Kinnig kelenn divyezhek er 1^{añ} derez (skolioù-mamm ha skolioù-kentañ)




▪ **2 lec'h divyezhek nevez zo bet digoret er skolaj :**


- o 1 gant an deskadurezh publik : Gwened (56). Dre se e teu Gwened da vezañ ar gêr gentañ gant ur c'hinnig er skolajoù gant an 3 hentad. Digoret eo bet hentad skolaj Karaez en-dro a-hend-all.
- o 1 gant an deskadurezh katolik : Lannuon (22). En enep, goude ma oa bet divizet lakaat hentadoù Karaez ha Pont-'n-Abad da gousket e 2011, n'eus skoliad ebet ken eno.

- **El liseoù**, eo bet lakaet da gousket hentad lise katolik Sant-Paol e Gwened. Rakwelet e oa bet treuzkas an hentad-se d'al lise Sant-Fransez-Zavier met n'eo ket bet graet. E Breizh a-bezh, n'eus mui nemet 1 hentad divyezhek hepken e liseoù an deskadurezh katolik (e Lesneven).

Kinnig kelenn divyezhek en eil derez (skolajoù ha liseoù)



Kinnig kelenn divyezhek dre DPKE¹



¹ Diazevadur Publik a Genlabour Etrekumunel (EPCI e galleg).

Sifroù

- **462 lec'h kelenn divyezhek** zo bremañ (hag 1 skol Diwan e Pariz). **211 skol-vamm divyezhek** a gonter.
- Da **15 840** e sav an niver a skolidi divyezhek e Breizh :
 - o 3 854 skoliad e Diwan (hag 11 e Pariz),
 - o 11 986 skoliad en deskadurezh par-ouzh-par : 6 887 er publik ha 5 099 en deskadurezh katolik.

Sifroù ar c'helenn divyezhek eus ar skol-vamm d'al lise

	Diwan	% kresk	Publik	% kresk	Katolik	% kresk	Hollad	% kresk
22	684	-0,6%	1 305	3,7%	406	7,7%	2 395	3,1%
29	2 078	5,1%	3 334	3,2%	1 967	4,9%	7 379	4,1%
35	195	16,1%	611	3,0%	411	0,0%	1 217	3,8%
44	341	2,1%	224	-4,7%	68	15,3%	633	0,8%
56	556	3,5%	1 413	5,1%	2 247	0,0%	4 216	2,1%
Breizh	3 854	4,0%	6 887	3,4%	5 099	2,6%	15 840	3,3%
Kresk	149		225		128		502	

- **Kreskiñ a ra an niver a skolidi e pep departamant.**
- **Kreskiñ a ra hollad an niver a skolidi e pep hentad.**
- **Ouzhpenn 5 000 skoliad zo en deskadurezh katolik divyezhek** bremañ.
- **Penn-ar-Bed** eo an departamant ma kresk ar sifroù ar muiañ e 2014 (294 skoliad ouzhpenn, +4,1%).
- **Sifroù Diwan eo a gresk ar muiañ** eus ar skol-vamm d'al lise er bloaz-mañ gant **+4%** e Breizh. Derc'hel a ra Diwan e feur kreskiñ e 2014 neuze (da 4,1% e sav keidenn ar 5 bloavezh tremenet) tra m'eo izeloc'h feur an hentadoù all : **+3,4% en deskadurezh publik** (+5,9% ent keitad etre 2009 ha 2013) ha **+2,6% en deskadurezh katolik** (+3,2% ent keitad war ar 5 bloavezh diwezhañ ; an diouer a lec'hioù digoret er 1^{añ} derez er bloaz-mañ zo unan eus abegoù pennañ ar c'hresk gwanoc'h).
- **E pep departamant** e kresk sifroù pep hini eus **an 3 hentad war un dro** (nemet evit Diwan en Aodoù-an-Arvor hag an hentad publik el Liger-Atlantel ; stabil eo sifroù an hentad katolik er Mor-Bihan a-hend-all). War wel e teu feur emdreiñ Diwan e Penn-ar-Bed (ma'z eus bremañ ouzhpenn 2 000 skoliad), an hentad publik er Mor-Bihan hag an hentad katolik en Aodoù-an-Arvor.

Sifroù ar c'helenn divyezhek er 1^{añ} derez

	Diwan	% kresk	Publik	% kresk	Katolik	% kresk	Hollad	% kresk
22	469	0,4%	1 112	3,8%	370	3,6%	1 951	3,0%
29	1 311	4,3%	2 908	2,1%	1 679	4,8%	5 898	3,4%
35	195	16,1%	440	3,5%	388	0,0%	1 023	4,3%
44	284	-2,1%	185	-7,0%	68	15,3%	537	-2,0%
56	424	4,7%	1 308	4,5%	2 014	0,6%	3 746	2,4%
Breizh	2 683	3,7%	5 953	2,7%	4 519	2,5%	13 155	2,9%
Kresk	96		159		111		366	

- Al lodenn vrasañ eus kresk an niver a skolidi a c'hoarvez er 1^{añ} derez (366 skoliad diwar 502).
- Bevenn ar 1 000 a skolidi divyezhek er 1^{añ} derez zo bet tizhet gant an Il-ha-Gwilen.


Sifroù ar c'helenn divyezhek er skol-vamm

	Diwan	% kresk	Publik	% kresk	Katolik	% kresk	Hollad	% kresk
22	227	0,4%	523	6,1%	147	7,3%	897	4,8%
29	622	3,2%	1 412	-2,6%	769	6,1%	2 803	0,9%
35	108	14,9%	193	-0,5%	200	2,6%	501	3,7%
44	152	-5,0%	90	-4,3%	43	22,9%	285	-1,4%
56	206	6,2%	718	2,7%	904	-1,8%	1 828	0,8%
Breizh	1 315	3,0%	2 936	0,2%	2 063	2,5%	6 314	1,5%
Kresk	38		6		50		94	

- Nebeutoc'h e kresk sifroù pep departamant er skolioù-mamm eget war an hollad ; **n'eus nemet en Aodoù-an-Arvor e c'haller lavaret ez eus lañs gant ar skolioù-mamm er bloaz-mañ** (+4,8% e-skoaz +3,1% eus ar skol-vamm d'al lise).
- **En deskadurezh publik, ne gresk ket hollad sifroù ar skolioù-mamm.** 3 departamant a goll skolidi d'al live-se : Penn-ar-Bed, an Il-ha-Gwilen (ma n'eus bet digoradur ebet abaoe 2003) hag al Liger-Atlantel (ma n'eus nemet 2 skol publik gant un hentad divyezhek, an hini vrasañ anezhañ o vezañ bet digoret 15 vloaz zo). Ne oa ket c'hoarvezet kement-se gwech ebet abaoe 2000.
- **En deskadurezh katolik, e tigrsk sifroù ar skolioù-mamm er Mor-Bihan,** anezhañ departamant pennañ an hentad-se.


Emdroadurioù an deskadurezh divyezhek

Emdroadur an 3 hentad




- **Kenderc'hel a ra** an niver a skolidi divyezhek **da greskiñ**. Kadarnaet eo adlañs Diwan goude ar prantad gorrekoc'h a oa bet etre 2003 ha 2008.

An niver a skolidi divyezhek ouzhpenn da bep distro-skol




- **502 skoliad divyezhek ouzhpenn** zo e 2014, ar pezh a zo nebeutoc'h eget keidenn an 10 vloaz tremenet (tost da 650 skoliad ouzhpenn bep bloaz, well-wazh etre 2004 ha 2013).

Dasparzh ar c'hresk etre ar c'hresk diavaez hag ar c'hresk diabarzh



- Daoust m'eo izel ar c'hresk diavaez stag ouzh an nebeud a lec'hioù zo bet digoret en distro-skol-mañ, ar c'hresk diabarzh a vir ul live etre a-drugarez, evit darn, d'al lec'hioù niverus bet digoret e 2012 ha 2013.

Emdroadur kresk ar c'helenn divyezhek



- **Da 3,3%** e sav ar c'hresk hollek. Kreñvaet eo an tuadur da c'horrekaat a oa bet sioulloc'h etre 2011 ha 2013 eget na oa bet etre 2007 ha 2010. **Eil feur kreskiñ izelañ biskoazh ez eo goude hini 2010.** Evit adkavout ur feur kreskiñ kreñvoc'h ez eus ezhomm da zigeriñ muioc'h a lec'hioù nevez eget na'z eus bet hevlene ha kement-se e pep hini eus an 3 hentad.

Stagadennoù

An niver a skolidi divyezhek dre zepartamant ha dre live

	Skolioù-mamm	Skolioù kentañ	Skolajoù	Liseoù	Hollad	Kresk	Feur kreskiñ
Aodoù-an-Arvor	897	1 054	391	53	2 395	71	3,1%
Penn-ar-Bed	2 803	3 095	1 009	472	7 379	294	4,1%
Il-ha-Gwilen	501	522	147	47	1 217	45	3,8%
Liger-Atlantel	285	252	96		633	5	0,8%
Mor-Bihan	1 828	1 918	444	26	4 216	87	2,1%
Breizh	6 314	6 841	2 087	598	15 840		
Kresk bloaziek	94	272	93	43		502	
Feur kreskiñ	1,5%	4,1%	4,7%	7,7%			3,3%

■ Kresk ■ Digresk

An niver a skolidi divyezhek dre hentad ha dre live²

	Skolioù-mamm	Skolioù kentañ	Skolajoù	Liseoù	Hollad	Kresk	Feur kreskiñ
Diwan	1 315	1 368	838	333	3 854	149	4,0%
Publik	2 936	3 017	733	201	6 887	225	3,4%
Katolik	2 063	2 456	516	64	5 099	128	2,6%
Hollad	6 314	6 841	2 087	598	15 840		
Kresk	94	272	93	43		502	
Feur kreskiñ	1,5%	4,1%	4,7%	7,7%			3,3%

■ Kresk ■ Digresk

An niver a skolidi divyezhek dre zepartamant ha dre hentad

	Diwan	Publik	Katolik	Hollad	Kresk	Feur kreskiñ
Aodoù-an-Arvor	684	1 305	406	2 395	71	3,1%
Penn-ar-Bed	2 078	3 334	1 967	7 379	294	4,1%
Il-ha-Gwilen	195	611	411	1 217	45	3,8%
Liger-Atlantel	341	224	68	633	5	0,8%
Mor-Bihan	556	1 413	2 247	4 216	87	2,1%
Breizh	3 854	6 887	5 099	15 840		
Kresk	149	225	128		502	
Feur kreskiñ	4,0%	3,4%	2,6%			3,3%

■ Kresk ■ Digresk

² Sifroù evit Breizh ; ur skol Diwan zo e Pariz ivez.

An niver a skolidi divyezhek dre zepartamant, dre hentad ha dre live

Dep.	Hentad	Skolioù-mamm	Skolioù-kentañ	Skolajoù	Liseoù	Hollad dre hentad	Hollad dre zep.
22	Diwan	227	242	215	0	684	2 395
	Publik	523	589	140	53	1 305	
	Katolik	147	223	36	0	406	
29	Diwan	622	689	434	333	2 078	7 379
	Publik	1 412	1 496	336	90	3 334	
	Katolik	769	910	239	49	1 967	
35	Diwan	108	87	0	0	195	1 217
	Publik	193	247	124	47	611	
	Katolik	200	188	23	0	411	
44	Diwan	152	132	57	0	341	633
	Publik	90	95	39	0	224	
	Katolik	43	25	0	0	68	
56	Diwan	206	218	132	0	556	4 216
	Publik	718	590	94	11	1 413	
	Katolik	904	1 110	218	15	2 247	

■ Kresk ■ Digresk

Renkadur ar c'humunioù diouzh o skolidi divyezhek (eus ar skol-vamm d'al lise)

Renk	Kumun	Dep.	Lec'h kentañ e	Diwan	Publik	Katolik	Hollad	Kresk
1	Roazhon *	35	1977	156	411	152	719	29
2	Kemper	29	1977	352	143	91	586	32
3	Gwened	56	1990	219	94	260	573	3
4	Karaez-Plougêr	29	1985	413	66	45	524	33
5	Naoned	44	1978	206	224	68	498	-7
6	Lannuon	22	1978	97	327	66	490	41
7	Brest	29	1978	199	239	41	479	37
8	Plougastell-Daoulaz	29	1995		204	206	410	12
9	Landerne	29	1987	62	244	100	406	16
10	Lanniliz	29	1995		229	144	373	-11
11	Lesneven	29	1981	97		190	287	3
12	Oriant (an)	56	1978	101	140		241	8
13	Releg-Kerhuon (ar)	29	1988	177	51		228	10
14	Teiz	56	1995		63	155	218	-26
15	Plijidi	22	1995	215			215	-6
16	Henbont	56	1997		33	163	196	6
17	Gwengamp	22	1981	81	16	96	193	-4
18	Langedig	56	2001		41	150	191	-9
19	Lannarstêr	56	1988		173		173	5
20	Lokournan	29	2008	67		105	172	14
21	Plunered	56	1998		50	119	169	15
22	Gwiseni	29	1990	118		44	162	14
23	Pondi	56	1984	69	30	62	161	14
24	Sant-Brieg	22	1979	86	71		157	-10
25	Sant-Teve	56	2001		47	109	156	3
26	Plabenneg	29	1991	23		132	155	-15
27	Logunec'h	56	2003			152	152	-4
28	Kemperle	29	1989	74	77		151	14
29	Montroulez	29	1988	69	81		150	6
30	Rostrenenn	22	1984		84	58	142	2

31	Redon	35	1997		57	85	142	-21
32	Landivizio	29	2000	16		121	137	10
33	Gwitalmeze	29	1977	67		63	130	-7
34	Douarnenez	29	1989		125		125	8
35	Loperch'hed	29	2004		123		123	11
36	Kastell-Paol	29	1978	60		57	117	-4
37	Banaleg	29	1982	52	63		115	0
38	Bruz	35	2003		115		115	4
39	Ploue	56	1994		113		113	15
40	Bear	22	2007		112		112	7
41	Brec'h	56	1989		111		111	-9
42	Ploveur	29	1993		110		110	-1
43	Kleder	29	1991		34	72	106	3
44	Baod	56	1991	48	58		106	-2
45	Dinan	22	2000	103			103	15
46	Brieg	29	2006		102		102	7
47	Pleuwigner	56	1994			102	102	6
48	Plougerne	29	1996		97		97	-3
49	Lokoal-Mendon	56	1994			97	97	-1
50	Milizag	29	2006		95		95	-5
51	Kawan	22	1987		93		93	3
52	Sizun	29	2004		93		93	-7
53	Gwidel	56	1991		93		93	2
54	Gwitreg	35	2007			89	89	6
55	Plounevez-Moedeg	22	2002	39	49		88	-10
56	Surzhur	56	2007			88	88	8
57	Pabu	22	1991		87		87	12
58	Plouzane	29	2003		86		86	10
59	Erge-Vras (an)	29	2002		64	21	85	17
60	Plouarzhel	29	2006			85	85	2
61	Plouvorn	29	2006			85	85	-8
62	Tremeven	29	2005		84		84	-3
63	Gouenoù	29	2004		82		82	4
64	Pempoull	22	1984	22	58		80	-1
65	Josilin	56	2003			80	80	7
66	Plistin	22	1999		79		79	-2
67	Konk-Kerne	29	1999		28	47	75	8
68	Lanneur	29	2004		72		72	6
69	Gourin	56	1994		41	31	72	-7
70	Kastell-Nevez-ar-Faou	29	2003		71		71	5
71	Kommanna	29	1977	70			70	-1
72	Plozeved	29	2007		70		70	-1
73	Gregam	56	1996			70	70	7
74	Alre (an)	56	1999	37		32	69	9
75	Gwipavaz	29	1995		68		68	-4
76	Gwiler-Leon	29	2002			67	67	1
77	Plougonvelen	29	2007		64		64	-10
78	Santez-Anna-Wened	56	1994			64	64	-10
79	Louergad	22	1998		63		63	1
80	Perwenan	22	1999		63		63	-1
81	Ploneour-Lanwern	29	2009			63	63	7
82	Ploueskad	29	1999			62	62	0
83	Plouha	22	2010		61		61	10
84	Pleskob	56	2005			61	61	3
85	Pont-Skorf	56	2001		60		60	8
86	Mourieg	56	2000			59	59	-7

87	Pont-'n-Abad	29	1995			58	58	-2
88	Sant-Ervlan	44	2008	57			57	13
89	Ploveren	56	2008		55		55	1
90	Gwegon	56	2000			54	54	-6
91	Lokmaria-Redon	35	2009			53	53	3
92	Rospezh	22	2004			52	52	0
93	Skaer	29	1998		51		51	-8
94	Pluverin	56	2005			51	51	-1
95	Rianteg	56	2009	51			51	1
96	Molan	29	2012		50		50	10
97	Pleiber-Krist	29	2008		48		48	2
98	Rosko	29	2002		48		48	-2
99	Begnen	56	2000			44	44	3
100	Tregon	29	1982	41			41	9
101	Kewenn	56	2006		41		41	-1
102	Boulvriag	22	2005	15		25	40	7
103	Maoron	56	2000		40		40	2
104	Sant-Martin-war-ar-Maez	29	2011		39		39	10
105	Muzilheg	56	2011			39	39	2
106	Sarzhav	56	1993		38		38	6
107	Lokmaria-Plouzane	29	2012			37	37	6
108	Sant-Tegoneg	29	2012		37		37	14
109	Karnag	56	1992			37	37	2
110	Eliant	29	2013		36		36	8
111	Plogastell-Sant-Jermen	29	2010	36			36	5
112	Bulad-Pestivien	22	2007		35		35	6
113	Sant-Riwal	29	1983		35		35	4
114	Klegereg	56	2004			35	35	-5
115	Faou (ar)	29	1998	34			34	-5
116	Gwenrann	44	1999	34			34	-2
117	Kastell-Bourc'h	35	2012			32	32	12
118	Mêlrant	56	2006			32	32	0
119	Perroz-Gireg	22	2007			31	31	2
120	Tregastell	22	1989		31		31	-3
121	Daoulaz	29	2006		31		31	-7
122	Fouenant	29	2013			31	31	17
123	Kraozon	29	1989	31			31	7
124	Sant-Nazer	44	1991	31			31	-2
125	Kaodan	56	2013			31	31	10
126	Kistreberzh	56	2000	31			31	-4
127	Mêl-Karaez	22	2004			30	30	-2
128	Landreger	22	1997			28	28	-3
129	Sant-Maloù	35	2000		28		28	-3
130	Sine	56	2011		28		28	7
131	Louaneg	22	2006	26			26	-7
132	Felger	35	2013	26			26	12
133	Noal-Pondi	56	2009			25	25	4
134	Ploermael	56	1994		25		25	5
135	Faoued (ar)	56	1993			24	24	-8
136	Pleuzal	22	2009		23		23	1
137	Plouvagor	22	2013		23		23	4
138	Pluguen	29	2012		23		23	1
139	Langoned	56	2012		23		23	9
140	Pluvergad	56	1996			21	21	0

141	Groñvel	22	1998			20	20	-2
142	Kastellin	29	2007	20			20	-1
143	Kore *	29	2014		20		20	20
144	Kerien	29	2011		17		17	-4
145	Plouneour-Menez	29	2013		17		17	1
146	Poullaouen	29	2010		17		17	-1
147	Ploueg-ar-Mor *	22	2014		16		16	16
148	Plañvour *	56	2014		16		16	16
149	Kallag	22	2012		14		14	-5
150	Magoer	35	2008	13			13	3
151	Savenneg	44	2009	13			13	3
152	Pariz	75	2004	11			11	-16

■ Kresk ■ Digresk

* Lec'h nevez-digoret er gumun da zistro-skol 2014

- Evit ar wech kentañ ez eus **ur gêr enni ouzhpenn 700 skoliad divyezhek : Roazhon.**
- Gant ur c'hresk uhelik **e tap Kemper an eil plas** digant Gwened.
- **Karaez a dremen a-us da 500 skoliad** hag a zeu da vezañ 4^e kumun Breizh diouzh an niver a skolidi divyezhek. Bras-bras eo lodenn al lise Diwan en emdroadur-se : degas a ra e Karaez skolidi eus Breizh a-bezh.
- **Lannuon** zo gant ar c'hresk brasañ a-drugarez, evit darn, da zigoradur an hentad er skolaj katolik. **Brest** zo gant an eil kresk brasañ (94 skoliad ouzhpenn zo bet e kêr e-korf 2 vloaz).
- **E Dinan ez eus bremañ en tu all da 100 skoliad** divyezhek gant ul lec'h divyezhek hepken er gumun (ur skol Diwan).

Mammennoù evit ar sifroù : Deskadurezh Stad, Deskadurezh katolik, Diwan Breizh, Ofis Publik ar Brezhoneg.